

Sijen Merzerien ar C'hoz-Varc'had 412

War don : *Aele deus ar Baradoz pe Diskennet eus an
Nenvou, Sperejou evurus, pe c'hoaz ive ton : Keven
'zo eur plas santel.....*

Petra a zo a neve e Kêr ar C'hoz-Varc'had,
Pa ve klevet ar c'hleier ken drant o vranskellat,
Ha pa ve klevet ive baz an tabouliner
O kas hekleioiu ken gae da zaonen al Leger ?

Hirie e vo deraouet aman war hon leur-gêr
Eur zijen-vaen gizellet d'hon merzerien ger,
Da vugale ar C'houerc'had kouezet war an dachen
O tifenn ar Frans, hon mamm. Enor d'é da viken !

Evit sevel ar skeuden hag hec'h ober ken kaer
Kenkouls paour ha pinvidik a rôas e ziner,
Evit ma vo dalc'het koun, en amzeriou da zont,
Deus hon c'henvroiz karet, hon zoudarded dispont

E-pad pevar bloaz amzer gant nerz o deus stourmet
Ouz fallagriez ar Boch, hon enebour touet,
An Aotrichian, an Turk hag ar Bulgar ive
Trec'het gant hon zoudarded, peulioù al Liberte !

Allas ! c'houec'h-ugent bennak deus hon c'henvroiz vad,
Tizet gant an enebour war dachen ar stourmad,
O deus skuilhet dizaouzan o gwad pur a Vreiziz
Evit miret d'hon bro-Frans liberte ha frankiz.

Ouspenn ar sijen gaer-ze, savet war al leur-gêr
'Kichen toull-dor ar vered ouz troad kroaz hon Zalver,
Eun daolen en maen-marbr gwenn a vo ive staget
Da zerc'hel koun da viken demeus hon zoudarded.

An hanoiu 'vo skrivet gant lizerennou aour.
Eno ne vo ket a gemm 'tre pinvidik ha paour :
Holl o deus skuilhet o gwad evit Frankiz ar Bed,
En hon anaoudegez-vad ra vevint a-gevred !

Kalz eus hon re 'voe tapet ha kaset en harlu ;
E bro ken trist ar Voched o deus bet eur reuz du !
Kalz all a zo mac'hagnet bete fin o buhe ;
Evit ar re-man ar Frans a vo mamm a drue.

Breiz, gwir berlezen ar Frans, bro a zo kaer-iskiz !
Diskouezet 'teus adarre d'ar bed da vailhantiz ;
Da vugale kalonek o deus dre viliero
Skuilhet hep damant o gwad evit difenn o bro.

'Vit merzerien ar C'houerc'had, da virout hoc'h envor
Hon c'halon a zo douget, hon yalc'h a zo digor. . . .
Ar Barz a dle c'hoaz ouspenn, en tu-hont d'e ziner,
Riman d'hon difennourien eur veulodi Jener.

Kousket, kousket, pell du-ze, emgannerien dispar !
Diskuizet, korfou marvel, 'n ho kweleou douar !
Hoc'h ineou, kurunet en Nenv gant gant dorn Doue,
E barr uhelan an oabl E azeul noz ha de.

Ac'hane, me a zonz d'in, ya ac'hane, sur mad !
C'houi 'wel ar sijen savet war leur-gêr ar C'houerc'had,
Hag an daolen kizellet en lizerennou aour
Gant hano ar pinvidik kichen hini ar paour.

Aotreadur goulennet evit teir eur amzer
Gant Mestr ar jeneraled, Jezus-Krist, Hon Zalver,
Da zisken c'hoaz eur wechig da welet Breiz-Izel,
Gwir « flourdélizen » ar Frans, ho Pro Goz divarvel.

Spererjou pur, diskennet deus lein ar Baradoz !
Deut c'hoaz eur wech da welet iliz kaer ho parroz,
D arvesti an ofisou a vo enni lidet
En enor d'ho vertuou gant hon Pastor karet ;

Da gemmeski ho moueziou a-unan gant hon re
'Vit kanan meulodiu gwenvidik d'hon Doue. . .
Da ziwez an ofisou e nijomp a spered
D'ambroug hoc'h ineou glan da balez an Dreinded.

Hon skeudennou a zo kaer, o greunennou 'zo pur ;
Ober a reont enor d'ar C'houerc'had a dra zur !
Kizellet int gant eun den 'zo eur bener dispar ;
Tro war-dro e bro-Dreger n'o devo ket o far

E-war eur baperenn-barch ar werz-man 'zo skrivet
Gant ar Barz koz Penhouarn en deus bet he rimet ;
Moulet 'vo e Sant-Brieg gant ar Barz Abherve,
« Rener koz » hon « C'hroazig » ker, hanvet Fransez Vallée.

Ouz troad ar zijen gaer ze e vo graet eun armel ;
Enni e vezo laket testeni divarvel
Demeus ar gouel-man ken brao hon eus hirie lidet
En enor d'hon c'henvroiz, trec'herien d'ar Voched.

Hag e-pad ar c'hentvedou, hon gournizien da zont
A zaludo gant doujans hon zoudarded dispont :
Rôet o deus o buhe 'vit ar Frans er brezel ;
Hon C'houn hag ar Baradoz 'zo o govr divarvel !

Ar C'houerc'had, 13 a C'houevrer, 1919.

G. DOUARON (Penhouarn).